


www.freemaths.fr

BACCALAURÉAT SUJET

Bac **LLCER, Breton**



ANTILLES-GUYANE
2026

BACCALAURÉAT GÉNÉRAL

ÉPREUVE D'ENSEIGNEMENT DE SPÉCIALITÉ

SESSION 2026

LANGUES, LITTÉRATURES ET CULTURES ÉTRANGÈRES ET RÉGIONALES

BRETON

Mercredi 17 juin 2026

Durée de l'épreuve : **3 heures 30**

*L'usage du dictionnaire unilingue non encyclopédique est autorisé.
La calculatrice n'est pas autorisée.*

Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.
Ce sujet comporte 9 pages numérotées de 1/9 à 9/9.

**Le candidat traite au choix le sujet 1 ou le sujet 2.
Il précisera sur la copie le numéro du sujet choisi.**

Répartition des points

Synthèse	16 points
Traduction ou transposition	4 points

SUJET 1

Le sujet porte sur la thématique « Représentations et expressions de la mémoire »

Axe d'étude : « Écrire ses mémoires, écrire l'histoire »

Partie 1 : synthèse du dossier (16 pts)

Prendre connaissance des documents du dossier et traiter le sujet suivant en breton :

Savit ur pennad-skrid (war-dro 500 ger) diwar an dielloù. Gallout a reoc'h lakaat war-wel :

- a) pouez an euredoù er gevredigezh e Breizh gwechall ;
- b) ar skeudenn a zo bet savet anezho ;
- c) ar mod ma 'z eo bet treuzkaset ar skeudenn-mañ betek ennomp.

Partie 2 : traduire le passage suivant du document D (lignes 26 à 30) en français. (4 pts)

Ar baotredigoù eus ma oad a zo gwisket dija e giz-kêr padal ar plac'hedigoù a zo gwisket c'hoazh e-giz o mammoù, dreist-holl ar c'hoef ma ouzont dija dres penaos e tle bezañ tuet evit o anaout diouzh merc'hed ar parrezioù tro-war-dro. Ac'hanta ! Ha war miaouadennoù skiltr ar vombard, war valeerezh sonus ar biniou o fennañ e notennoù re-bar d'ar greun a-dreuz un tamouez, e vroudont o dañserien da ganañ ar gavotenn e brezhoneg.

Diell A

Echu e oa ar friko ha kaset e oa bet an dud nevez d'ar gêr. Soubenn al laezh, gant ur chapeledad kraoñ-dimezell en he c'hreiz, a oa bet servijet, dirak ar gerent ha tud all an eured, d'an daou bried yaouank en o gwele. Kanet e oa bet d'ar re-mañ, gant mistri kanerien, *Son ar soubenn-laezh* keit ha ma oa ar sonerien o son da vat an ton anezhi.

Er penn uhelañ d'an ti, e-kichen an oaled, edo an daou gañfard-mañ o ren an abadenn. Mav ha seder e oant o-daou, rak pep a zevezh mat o devoa graet an deiz-se. En-dro da dog pep hini anezho e oa rollet ur walennad voulouz-kordonenn eus ar c'haerañ, ouzhpenn un troatad lec'hed dezhi. Evel-se e veze paeet ar sonerien, gwechall, e bro ar Rouziged¹.

Gant o zogoù, pintet ken uhel, e stokent ouzh solioù an ti, ha tennañ a raent evel-se da zaou ramz hag a vije bet deuet da lakaat korriged da zañsal.

Krozal a rae an ti, adalek an diazez tre betek al lein, gant son ha ton, ha laouen-bras e oa an holl. Evañ a reas c'hoazh an dud bep a vanne sistr ha bep a vanne hini kreñv, ha goude bezañ graet un taol jabadao e-kreiz al leur-di, evit echuiñ an devezh, e lavarjont kenavo ha chañs vat d'an dud nevez hag an eil d'egile. Pep hini diouzh e du a gemeras neuze penn an hent da vont d'ar gêr, tomm d'e glipenn ha pounner e zivesker, rak stank a oa bet ar banneoù ha nebeut-tre a ziskuizh etre pep abadenn dañs.

Yeun AR GOW, *Ur galedenn a zen*, Hor yezh, 1973.

¹ Bro ar Rouziged : ar vro tro-dro da Gastellin



Jos LE DOARE, *Noce bretonne* (Pays de Châteaulin, vers 1900).
www.collections.musee-bretagne.fr

Diell C

Son an eured

- Daouzek taol a zo savet,
Eizh kant a dud 'n em gavet,
Gwisket holl en o c'hranañ
'Vel o tont da bardoniañ ;
5 Kement a oa pedet,
Kar, amezeg pe mignon,
 Zo buan deredet
 Laouen o c'halon.
- Ouzh an taolioù e preder
10 Kaozeüs ha dibreder,
 Ar paour 'tal ar pinvidig,
 Ar c'hozh 'tal ar bihanig ;
 Ha chistr tomm Breizh-Izel,
Diskennet er c'haliroù,
15 A lak war bep muzell
 C'hoarzh ha marvailhoù.
- Neuze 'sav mouezh ar varzhed
D'enoriñ an daou bried,
Da ganañ de' meuleudi
20 Ha kaerder o c'hefridi ;
 Da c'houlenn evite
Digant Mestr bras an Neñvoù
 Eürusted, karantez
 Ha bugaligoù.
- 25 Ha da zañsal adarre
 Tra ma vo gwelet bale,
 Tra ma c'hwezh ar sonerien
 Diwar lein o barrikenn :
 Ebatiñ 'ra hirie
30 Pep hini deus e wellañ ;
 'Benn warc'hoazh marteze
 'Vo lec'h da ouelañ.

Tennet eus Toussaint LE GARREC, « Son an eured »,

Diell D

- An dimeziñ kentañ ma'z on bet ennañ gant ma mamm a zo hini merc'h ur feurm vras en douaroù war-du Plogastell. Nebeut amzer abaoe 'm eus dilezet ma brozh evit sevel bragez. Dihunet mintin mat, gwisket 'm eus ma dilhad nevez e-giz kêr hag e c'hortozan gant mall Marijan ar Gov n'eus fin ebet ganti da rikamaniñ he c'hoefoù nevez. Perak e c'hortozan anezhi, n'ouzon ket mat peogwir n'eus ket kaoz evidomp da vont da gerc'hat ar verc'h nevez en he zi, re bell emañ ha ne dalvez ket mont abalamour e tremeno dirak hon treuzoù evit mont d'an iliz ha neuze e vo deomp da heuliañ an dud. Huanadiñ a ran avat pa soñjan ez eus dija degadoù ha degadoù a dud oc'h ober chervat en he zi e-pad m'emaer o wiskañ anezhi.
- Er porzh bras ar sonerien a daol dija an ton-digor, ar gavottennerien gentañ a ya war renk. Echu an amzer ma'z ee ar verc'h nevez da glask ur c'hlasker-bara da zañsal. N'eus forzh peseurt gwaz amañ, avat, a c'hell goulenn diganti ha digant an dañserezed all memes tra. Paotred ar friko, ponner o sac'h gant bouedoù hag an evajoù, a zo da lezel ar plas gant ar re nevez digouezhet.
- En dañsoù abardaez-se emañ ivez an dud kozh a zo gouest c'hoazh da lakaat o izili da sentiñ outo hag ar vugale, e brozh zoken, a zesk er mod-se, adalek o oad tener, kas al lid d'adstardañ o boutinded dibar en ur dresañ pazioù gavotenn Vigoudenn Pouldreuzig a zo, an holl her goar nemet disleal e vefe, gwelloc'h eget hini Blozeved.
- Gwelet a reer plac'hedigoù seizh pe eizh vloaz o tivankañ paotred pevar pe bemp bloaz koshoc'h egeto. Ar c'haerelled a oar dija pikañ ha digas o gar dres e-giz ma tle, na muioc'h na nebeutoc'h. Gouzout a reont ivez penaos ar vezh-fur² o deus da ziskouez a gemenn dezho dañsal izel, tostik a-rez an douar, padal ar baotred a rank dañsal uhel evit enor ar bragoù a zo ganto. Ha goap a reont ouzh o c'hendirvi re abaf pe re gropet evit sevel o daoulin betek o divskoaz :
- Dañsal a rit e-giz ur plac'h. Me lavaro d'ho mamm lakaat ur vroz deoc'h.
- Ar baotredigoù eus ma oad a zo gwisket dija e giz-kêr padal ar plac'hedigoù a zo gwisket c'hoazh e-giz o mammoù, dreist-holl ar c'hoef ma ouzont dija dres penaos e tle bezañ tuet evit o anaout diouzh merc'hed ar parrezioù tro-war-dro. Ac'hanta ! Ha war miaouadennoù skiltr ar vombard, war valeerezh sonus ar biniou o fennañ e notennoù re-bar d'ar greun a-dreuz un tamouez, e vroudont o dañserien da ganañ ar gavotenn e brezhoneg.

Per-Jakez HELIAS, *Marc'h al lorc'h*, Emgleo Breiz, 2002 [1986].

² Mezh-fur : pudeur, retenue

SUJET 2

Le sujet porte sur la thématique « Circulation des personnes, des langues, des cultures et des idées »

Axe d'étude : « Langues et cultures en contact »

Partie 1 : synthèse du dossier (16 pts)

Prendre connaissance des documents du dossier et traiter le sujet suivant en breton :

Savit ur pennad-skrid (war-dro 500 ger) diwar ar peder diell. Gallout a reoc'h toullañ meur a hent ha klask gouzout peseurt liammoù, kozh ha nevez, a zo etre Breizh ha Kembre ha penaos e oa bet maget identelezh Bretoned zo gant Kembre.

Partie 2 : traduire le passage suivant du document D (lignes 6 à 12) en français. **(4 pts)**

« Ha faltazi. Kembre... Mor ha menezioù. Ur Vreizh tostoc'h d'an neñv erc'h he c'hernioù, nes d'an ifern ivez he zraoniennoù saotret gant lorgnezh du ar mengleuzioù. Aze e klever ivez hor yezh. O, ya, diforc'h mat eo eus hor brezhoneg, ha diaes d'he c'hompren. Kaletoc'h eget yezh Arvor ha dezhi sonioù iskis, ha koulskoude ken fraezh atav, ha ken boemus pa gomz a garantez. [...]

Ur vro ma n'o deus ket ankouet an dud o lorc'h, ma klever kenkoulz ha mil bloaz zo korioù o kanañ gwerzennoù awen strizh hag uhel ar varzhed. »

Diell A

E gwirionez, n'he doa ket gouiet doc'htu Anna, e-men¹ e oa degouezhet, a p'he doa digoret he daoulagad ha sellet dre fenestr an tren. Helen, hi, a zistagas he sac'h-kein a-zoc'h he skoaz hag analat a raas don pa ziskennas ag an tren.

– Pegen c'hwek, pegen brav bout amañ ! a zistagas-hi minc'hoarzhus.

– Ne welan ket petra a gavit plijus amañ ? Analat moked ar gêr vras ? En em siliñ a ra e pep lec'h en ti-gar ! a respontas he c'heneilez en ur lakaat he sac'h-kein e-tal he hani, àr ar leur.

– Amañ e krog Bro-Gembre ! a vadailhas Helen.

– Èl ma krog Breizh kostez Bourdel, neuze !... a oc'hpennas goapaus ar Vreizhadez !

– Atav emañ e Bristol em eus anavet ar muiañ a Gembreiz yaouank. Kamaraded skolaj ha lise a zae a bep seurt tuoù a Gembre da heul o zadoù. Naon ho peus ? Daomp da zebriñ gwir voued magus, a lâras èl a pa vehe bet ur liamm bennak etre an div soñj.

– Gwir voued ? Perak, petra ho peus ijinet c'hoazh ? a lâras Anna, boemet !

– Daomp d'ar *fried fish and chipped potato bar*. Emañ just e-tal an tour *Cabot*, e-kreiz kêr.

Sellet a rae Anna doc'h he c'hamaradez, èl a pa vehe bet daet ag ur blanedenn arall. Komz a rae honnañ² diàr ar vro-mañ ha kaer he doa Anna goulenn talvoudegezh ar lec'hioù a venege ne responte ket. « Biskoazh ! » a lâras-hi a-vouezh izel. Buan e oant en em gavet dirak an tour, é treuziñ ar park-kêr ledan. Tud yaouank a farse hag a lâre kaer, azezet àr ar bankoù koad dislivet.

David AR GALL, *Bara Brith*, Al Liamm, 2015, p. 26-27.

1 e-men : pelec'h

2 honnañ : homañ

Diell B



Diwar al lec'hienn www.festival-interceltique.bzh

Diell C

Traonienn ar Sent e Karnoed

Meur a wech em eus bet tro da dreuziñ ha didreuziñ torgenn Kenekilheg eus un delwenn d'un all. Pa 'z oc'h bet ganet e-tal da Lanildut (Iltud), e parrez Plouarzhel (Arzhmael), e-kichen Lambaol (Paol Aorelian) e kornad Lokournan (Ronan) ha c'hoant ganeoc'h kompren ar bed tro-dro, en em c'houlennit ar pezh zo skoachet a-dreñv an tudennoù hollvezant-se. [...]

5 Liammet eo an anvioù-se gant mare staliadur ar Vretoned en Arvorig. Un toullad eus an tudennoù graet sent anezho gant ar vroiz a zeue eus kostez LLanylltud (Llatwyt bremañ) pe Inys Byr e su Kembre, Iltud o vezañ bet awener meur ar skolioù menec'h-se. Oc'h en em harpañ war prederioù o araoger Morgan (Pelagius), paotr an dibab dieub, pe dre briziañ skridoù ha preder unan anezho anavezetoc'h, Gweltaz, e komprenker kerkent e oant tud solut o foell, prezegennerien donezonet gouest da varn ha da guzuliañ, o chom uvel e-barzh o lokoù digenvez. E-se e tiazezent kumuniezhioù nevez (ploueoù), kristen met ivez sivil, o vodañ Armorikaned dilezet a-bell oa gant ar bed roman ha Bretoned annezet a-nevez o klask ul lec'h sioul (Llydaw e kembraeg). Gant ar vrud hag ar bri bet douget dezho e oa bet divizet reiñ o anv d'ar c'humuniezhioù nevez, pa voe dalc'het un identelezh heverk da bloueoù all (Plougastell/Plogastell, kumuniezh ar « castellus », Ploumoger/Plonger/Plouvagor, Plougerne...). Savet ez eus bet evel-se ur relijion gristen boblek, pell diouzh urzhas ar romanegezh, o lidañ Gouel an Anaon ha n'eo ket hini ar re varv, o tegemer moarvat lod tresoù dibar eus kredennoù koshoc'h evel galloud pareañ an dourioù, uhelennoù sakralizet, perzhioù gwareziñ ar sant-mañ-sant...Ur perzh bras ez eus bet ganti e savidigezh pobl ar Vretoned met ivez e diorren ar yezh keltiek lec'hel. Ampledet eo bet a-hed ar remziadoù brud an ermited-se betek bezañ dilennet da sent gant ar bobl, ha betek sevel ur mojennerzh marzhus ha marvailhus en-dro d'o buhez, dragoned flastret, bleizi doñvaet ha kement zo. Neuze, estreget ar birvilh relijiel, ez eus bet dalc'het da grouiñ ur sevenadur brezhonek dre gomz ha dre skrid pinvidik a-hed an amzer.

Paol MINGANT, *in Ya!*, Niv. 689, 24/08/2018.

Diell D

Kembre

Kembre. Nag a zremmwelioù a vez digoret d'hor spered gant an anv-se. E-pad ar bloavezhioù brezel e oamp didroc'het eus Breizh-Veur, eus ar Vammvro. Dizarempred gant hor breudeur tramor. O ankouaat na raemp ket, neoazh. Ar c'hoant hag ar garantez a voe kresket hepken a-se. Ar re yaouank dreist-holl, nevez-c'hanet d'o bro, d'o yezh alies, a gleve hiraehz an anvioù kar hag heson : Abertawe, Caerfyrddin, Bangor...

5 Ha faltazi. Kembre... Mor ha menezioù. Ur Vreizh tostoc'h d'an neñv erc'h he c'hernioù, nes d'an ifern ivez he zraoniennoù saotret gant lorgnezh du ar mengleuzioù. Aze e klever ivez hor yezh. O, ya, diforc'h mat eo eus hor brezhoneg, ha diaes d'he c'hompren. Kaletoc'h eget yezh Arvor ha dezhi sonioù iskis, ha koulskoude ken fraezh atav, ha ken boemus pa gomz a garantez. [...]

10 Ur vro ma n'o deus ket ankouet an dud o lorc'h, ma klever kenkoulz ha mil bloaz zo korioù o kanañ gwerzennoù awen strizh hag uhel ar varzhed. Bro santel, pet ene yaouank o deus huñvreet mont davedout evel pirc'hirined leun a c'hoanag ?

A.E. KENON, *Al Liamm*, Niv. 1, 1946, p. 7.